

Ar Bennherez

Méto. ♩ = 93 environ.



Di-bon-jour, bon-soir en ti - man, Di-bon-jour, bon-soir en ti -



man, Ar benn-he-rez e p'lec'h e man? O ram tam



tam ta - ri - da ri - da, O ram tam tam ta - ri - da.

II

ma 'z eo 'r bennerez a glazekz (*bis*).
Stramailhaen gaër 'zaremp.edez,
O ram, etc...

III

Ar bennerez 'zo porz al lez (*bis*)
Ha 'zo en ti,... man minorez

IV

Pa zeu d'ar gear, noz divezad (*bis*)
Sarret an or, prenestr he zad

V

Sarret ar prenestr hag an or (*bis*)
Ne gredfe den goude digor.

VI

Kit en traon gant ar vinojen (*bis*)
C'hui en em gavo e penn al lenn.

VII

Dibonjour d'eoç'h, plac'hik al lenn (*bis*)
C'hui a zaon kaër, c'hui a vucl'h guen (1)

VIII

C'hui a zaon kaër hag a vucl'h guen (*bis*)
C'hui vucl'ho d'in-me va chupenn.

IX

Ne zaonan kaër, ne vucl'han guen (*bis*)
Ne vucl'hin ket d'eoç'h ho chupenn.

X

Lezit ho kolvez 'vont gant 'dour (*bis*)
Ha decomp,da ober al l'amour...

XI

Lezin ket va golvez gant 'dour (*bis*)
Ha n'inn ket da ober l'amour...

XII

Me meuz eur breurik a bell bro (*bis*)
Iiennez 'glevo va dizurjou...

XIII

Me 'z eo da vreurik a bell bro (*bis*)
Ne glevan ket da zijurzou...

XIV

Dioa vinojen 'zo 'tal an ti (*bis*)
Unan d'ar c'haz, eun all d'ar c'hi...

XV

Unan d'ar c'haz, eun all d'ar c'hi (*bis*)
Kemer unan ha fil ganthi.

(1) Vucl'h = laver.